

D'ar 1^{añ} a viz C'hwevrer.

- War-dro 390, e Flaminia, distro da Zoue ene **sant Sever pe Severin**, eskob Ravenna a zifennas feiz goursenez Nikaia e doueelezh ar Verb a-enep an Ariaded.
- Er bloaz a c'hras 656, **sant Sigisberzh III** (Gl. Sigebert pe Sigisbert), roue Aostrazia. Hag eñ mab Dagoberzh I, roue ar C'hallaoued, e voe badezet gant sant Amand Maastricht. Gouarn a reas e rouantelezh gant furnezhh, o tiazesañ manatioù niverus. Sebeliet e voe en iliz Sant-Varzhin Metz a oa bet savet gantañ.
- Kounidigezh **Merzherion Anjev**, en o zouez 12 beleg, teir leanez ha 84 den lik (4 gwaz ha 80 maouez), dibennet pe fuzuilhet e 1793 ha 1794 en abeg d'o feiz da-geñver ar Dispac'h Gall.
- Er VI^{vet} kantved, **sant Euni pe Ewin**, abad iwerzhonat, breur sant Herec'h, sant Erc'h ha santez Yae. Diskibl sant Gwengar, e vije bet merzheriet a-gevret gantañ.
- Er VI^{vet} kantved, **sant Seriel**, abad e Penmon en enez Von, mignon da sant Kebi.
- **Sant Ildiarn**, eskob e bro-zDevnon an enezenn (Kernev-Veur).
- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **santez Cinne**, leanez diskiblez da sant Padrig.
- En Iwerzhon, war-dro 523, **santez Berc'hed** (Iw. Brighid), abadez Cill Dara (Kildar). Sevel a reas manatioù war an enezenn o kenderc'hel gant an oberenn avielañ kentradet gant sant Padrig. Dre ma roas, war un dro gant sant Padrig, an Doue gwirion da anaout d'he c'henvroiz, e vez kehelet santez Berc'hed evel "Mamm Iwerzhon" pe "Mamm ar vro." Keñveriet e vez zoken gant ar Werc'hez hag en ur vont betek ober "Mari Iwerzhon" anezhi, ken don ma voe he levezon da-geñver savidigezh an Iliz eno.
- Er VI^{vet} kantved, **santez Dearluaghach** (eleze **Derluc'hég**), abadez Cill Dara goude santez Berc'hed.
- E Breizh e 1163, distro da Zoue ene **ar gwenvidig Yann Kastellan**, lesanvet "**Yann ar Gael**", eskob Aled a zilezas sez an eskobiezh eus Aled da Sant-Maloù e 1146. Bez' e voe kentañ abad kisterkiat Langroaz-Gwengamp gwarezet gant an dugez Ermengard ha da c'houde e voe kaset gant sant Bernez da ziazezañ abati Buzae en eskobiezh Naoned.
- En XII^{vet} kantved, **sant Aoperzh**, kendiazeour abati Sant-Sulpis-ar-C'hoad gant Raoul ar Fusteg.
- E 1174, **sant Connor**, beleg, Iwerzhonad, kiminiad e Lemenc (Chambéry) er vro-Savoe.

D'an 2^{eil} a viz C'hwevrer

- **Gouel Kinnigadenn an Arloz pe Gouel Maria ar Gouloù**. D'an daou ugentved deiz goude Ginivelezh Jezuz, gouel ar C'Hrist "gouloù da sklêrijennañ ar broadoù" (Lk 2,32) testeniet e Jeruzalem e 386, degemeret gant Roma adalek ar VII^{vet} kantved. D'an deiz-se e venniger ar piledoù da-goulz al lidkerzh neuze e vez anvet ivez c'hoazh *fésta candelarum* eleze "gouel ar gouleier". Gouel kumun gant ilizoù ar Reter ma vez anvet ganto *Gouel ar Gejadenn* pe *Gouel an Aotroù o tont en Templ*.
- E 619, **sant Laorañs**, kentañ warlerc'hiad sant Eosten war sez eskobiezh Kêgent e Bro-Saoz.

- E 652, merzherenti **sant Adalbad pe Adalband**, feizvonnour. Hag eñ genidik eus Bro-Flandrez e oa soudard e Bro-Euskadi pa zimezas gant santez Rigrud evit sevel un tiegezh kristen lec'h ma c'hanas santez Euzebia. Da-geñver ur veaj e bro-Vesunna (Perigüers; Perigueux) e voe lazhet avat gant izili eus tiegezh e wreg a oa gwarizius en e geñver.
- E 1590, **santez Katarina Ricci**, prioiez Dominigadezed Ricci. Kenskrivañ a rae gant ar sent Pius V, Charlez Borromeo ha Mari-Madalen Pazzi o kenlabourat da luskad adreizhañ ar XVI^{vet} kantved kantved.
- E 1861, merzherenti **ar gwenvidig Teofan Venard**, beleg eus Kevredad Misionoù Diavaez Pariz. Genidik e oa eus eskobiezh Poitiers. Harzet goude eizh bloaz a abostolerezh dre guzh e Bro-dTonkin e voe toulbac'het a-hed mizioù ha dibennet d'an oad a 31 bloaz.
- E Breizh, e 640, **sant Gwal** (Lt. Vodoalus), penitiour e Lokoal-Mendon, marvet e Lokoal Kamorzh.
- E 1679, **ar pac'hiad Baltazar Grangier**, eskob Landreger, pastor gredus, gwarezour misionoù an Tad Juluan Maner.
- E 1752, tremenvan **ar pac'hiad Jozef Arot**, dean alvokaded Breudoù Breizh, brudet evit e vuhez kristen skouerius hag e vertuzioù.
- En Iwerzhon, **sant Athracht**, abad Cill Saile.
- War enez Vanav, er VI^{vet} kantved, **sant Ronan**, eskob.

D'an 3 a viz C'hwevrer

- War-dro 320, merzherenti **sant Blaez**, Armeniad, eskob Sebast (hiziv Sivas e Turkia), burzhudour meur, lazhet e dibenn an heskinadegoù bras. Ur wezh ma voe galvet da saveteiñ ur bugel en doa lonket ur draen pesk, e kemeras daou biled eus gouel ar Gouleier a oa etre daouarn ar vamm hag en o lakaas ouzh korzailhenn ar bugel a bareas trumm. E koun ar burzhud-se e c'hell ar veleion gourlakaat piledoù bet benniget d'an dec'h hent ouzh korzailhenn an dud pe c'hoazh bennigañ bouedoù da bareañ ar boan-c'houzoug.
- War-dro 699, e Trentham e Bro-Saoz, distro da Zoue ene **santez Werburga** pe **Werburch** pe **Gwerbourc'h**, abadez, patromez Chester. Merc'h ar roue Wulfhere a vMersia ha santez Ermenilda e voe abadez Enly war-lerc'h houmañ ha warlerc'h he mamm-gozh santez Sexburga hag he moereb-gozh santez Ethelred.
- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Morvred**, manac'h e Landevenneg, diskbl sant Gwennole.
- E Breizh, e 1951, ganedigezh en neñvoù **Mamm Ivona-Amis a Jezuz**, superiorez kouent Eostenezed Malastreg, hollsuperiorez kentañ kevreadiezh an Eostenezed bet savet ganti, kevrinourez espar.
- E 865, **sant Ansgar** (pe Oskar, Gl. Anschaire), eskob Bremen-Hamburg, abostolour ar Skandinaviz. Da gentañ manac'h beneadat e Corbie e Pikardia hag da c'houde e Corwey e Bro-

Saks, e voe galvet gant ar pab sant Nikolaz da ziazezañ Iliz ar C'hrist e-touez an Daniz hag ar Svedeniz.

- E 540, e Porthya, en Devnon (Kernev-Veur), merzherenti **santez Yae**, Iwerzhonadez, gwerc'hez c'hoar ar sent Euni, Herec'h hag Erc'h; kv Plouie, e Breizh (Poher).

D'ar 4 a viz C'hwevrer

- Er I^{añ} kantved, distro da Zoue **santez Veronika**, diskiblez an Arloz. Hervez an hengoun e sec'has gant he lien dremm hor Salver war hent ar Groaz. Bez' e vefe gwreg Zache *alias* Amadour hag e vije deuet gantañ e Galia.

- Er IV^{re} kantved, en Egipt, merzherenti **ar sent Fileaz ha Filorom**. Hazhet e voe an eskob Fileaz da-geñver hekinadeg Diocletianus ha kaset da Aleksandria. E-keit ha m'edo ouzh e c'houlennata, e klemmas Filorom, leun a estlamm evit an tamallad hag e enebas ouzh ar varnerion a glasse rediañ Fileaz da nac'hañ e feiz. Diwar-se e voent lakaet o-daou d'ar marv.

- E 1191, e Bro-Saoz, **sant Jilberzh**, beleg, diazezeur Chalonied Reoliek Sempringham. Mignon da sant Bernez ha da sant Tomaz Becket.

- E 1505, e Bourges e Bro-C'hall, **santez Janed a Valois**, diazezeur. Hag hi rouanez Bro-C'hall bet argaset gant he gwaz Loeiz XII - a zimezas gant Anna Breizh - e tiazezas Leanezed Mari Gelaouet (anvet *Annoniadeged*).

- En hanternoz enezenn Vreizh (Bro-Skos), er VII^{vet} kantved, ganedigezh en neñvoù **sant Maodan pe Modan**, Iwerzhonad, eskob abad Kell-Modan.

- E Bro-Iwerzhon, er VII^{vet} kantved, **sant Cuanna**, kelenner sant Fieg.

- War-dro 640, e Bro-Artez, **sant Lifarzh** (Lt. Lietphardus), arc'heskob Kêrgent. Dont a reas da benitiour e Bro-Gwenrann en eskobiezh Naoned lec'h ma kaver ur barrez dindan e anv. Edo o tistreiñ eus Roma gant Ceadwalla (pe Gadruel), a vije bet ur roue breizhat, pa voe drouklazhet e Bro-Artez lec'h ma vez enoret bepred e Honnecourt.

- Kounidigezh **Strinkadur an Teir Zakenn Gwad en iliz-veur Kemper**, ur burzhud c'hoarvezet da-geñver ar c'hroaziadegoù.

D'ar 5 a viz C'hwevrer

- E 251, e Catane e Sikilia, merzherenti **santez Agata**, gwerc'hez. Dre nerzh ar Spered Santel e voe trec'h war un heskinadur a lakaas meur a gristen da zinac'hañ ar feiz. Meur a vurzhud a deurezas an Aotroù Doue aotren drezi.

- E 525, e Viena en Daofinez, **sant Avit**, eskob ar Vurgondiz, kuzulier ar roue gall Klodwig I^{añ}, doueonour ha skrivagner, e stourmas a-enep an ariadegezh. Lakaat a reas ar roue sant Sigismond da zistreiñ d'ar feiz katolik.

- E 705, **sant Bertulf** (Berton, Bertoul, Berthold), abad. Melestrour kont merovingat Wambert Renty ez eas da vanac'h hag e voe diskibl sant Audomar, abostol ar vMorined. Avielour ar pagus Teruanensis pe bro dTerroane ha bro Audomar e Bro-C'hall, e tiazezas abati Renty.

- E Breizh, er VII^{vet} kantved, **sant Merin**, penitiour skosat deuet da Vreizh.
- E Kembre, **sant Jera**, tiern aet da benitiour.
- E Breizh-Veur, e 728, **sant Ina pe Inor**, mab sant Kezwal. Roue ha madoberour abati Avallon, e tilezas e dron evit mont da birc'hirin dianav ha paour.

D'ar 6 a viz C'hwevrer

- War-dro ar bloaz a c'hras 311, e Kaezarea Kappadokea, merzherenti **santez Dorotea**, gwerc'hez. Harzet en abeg d'he feiz e voe fiziet e div c'hoar anvet, Crysta et Callista, o doa-int dilezet ar feiz, gant ar spi d'he lakaat ivez da zinac'hañ. Hogen, er c'hontrol, hi o lakaas o-div da zistreiñ d'ar C'hrist. Neuze e voe jahinet ouzh ar gazeg-koad hag en diwezh dibennet. Da goulz he marv, gant burzhud ar banerad frouezh ha bleunioù diskennet eus an neñv, e c'hounezas da Zoue an ofiser Teofil a voe dibennet d'e dro. He relegoù a vez miret e Roma en iliz gouestlet dezhi en Trastevere.
- E 540, **sant Vaast pe Gaston**, eskob Arras, abostolour Bro-Artez ha Bro-Flandrez e-pad 40 bloaz, katekizour Klodwig I^{añ} a Vro-C'Hall. War e vez e voe savet ur manati a voe penn-kentañ kêr-Arras.
- E 1597, e Nagasaki, **Merzherion ar Japan : sant Paol Miki hag e geneiled**. Gantañ e oa 25 den, leaned ha liked, a voe kroastaget en abeg d'o feiz. Endra ma pardone d'e vourevion ha ma pede evit Bro-Japan e tisklerias sant Paol diwar e groaz e oa "*hent nemetañ ar silvidigezh hini ar Gristenion*."
- E 675, distro da Zoue **sant Amand**, eskob Maastricht, Patrom koruniad ar vreserion hag ar werzhourion gwin. Ganet e Erbatilicum (Ar C'hlaizideg, e galleg Herbauges) e Bro-Rezh-Deaz e 594, e voe penitiour en Enez-Euz ha war-lerc'h e Bourjez. Ac'halene ez eas da embann Komz Doue e Galia Belgia. Eskobet e 628 evit sez Maastricht e chomas tri bloaz eno ha da c'houde ez eas da sevel kumuniezhoù ha manatioù diouzh doareoù sant Koulman. Echuiñ a reas e vuhez e manati Elnon en doa diazezet war ar stêr Scarpe (bremañ Saint-Amand-les-eaux).
- En Iwerzhon, war-dro 488-490, **sant Mael**, eskob Ardach. Mab henañ Konan Meriadeg ha santez Darerc'ha, eskobet gant sant Padrig. Reiñ a reas he gouel da santez Berc'hed.
- Er V^{vet} kantved, **sant Maelgi**, eskob Armagh en Iwerzhon, penitiour e Bro-Skos, Mab Konan Meriadeg ha santez Darerc'ha, breur sant Mael, eskob Ardach; ha **sant Mun**, eskob Tadel en Iwerzhon ha penitiour, anavezet evel breur sant Mael pe, a-wezhioù evel mab santez Tigrid.
- C'hoazh er V^{vet} kantved hag en Iwerzhon, **santez Ac'ha pe Aza** (Gl. Achée) ha **santez Lallog**, gwerc'hez ha penitiourezed. Hervez an hengoun ez int merc'hed Konan Meriadeg ha santez Darerc'ha, hag hi c'hoar sant Padrig.
- Er V^{vet} kantved., **santez Agiol**, leanez.

D'ar 7 a viz C'hwevrer

- War-dro 305, e Bro-Frija, merzherenti **sant Adaogt** (Lt. Adauctus ; Gl. Adauque). Ganet en un tiegezh illur a Vro-Italia e voe fiziet ennañ ar c'hargoù uhelañ gant an impalaered met ne dermalas ket enebañ ouzh Diocletianus ha Maksimianus a-zivout feiz ar Gristenion.

- E 722, distro da Zoue ene **sant Richarz**, roue sakson ar Wessex, pirc'hirin ha feizvonnour. Dimezet gant ur vrientenez kar da sant Winfrid pe Bonifacius a roas dezhañ tri bugel: sant Walburg, sant Willibald ha sant Winibald. Goude bezañ ranket dilezel e garg ha klask repu e Rouen ez eas gant e zaou vab da birc'hirinañ da Roma lec'h ma chomas ur pennadig a-raok mont en-dro gant e hent ha mervel e Lucca e Toscana.

- E 1878, e Roma, **ar gwenvidig Pius IX**, pab. Ganet e 1792, e oa Giovanni Maria Mastali Ferretti eskob Imola pa voe diuzet da bab d'ar 16 a viz Mezheven 1846. E-doug e babelezh a voe an hini hirañ na oa bet biskoazh e tifennas ar feiz katolik gant hardiziegezh, e c'hourbannas bongoel Koñsevidigezh Dinamm ar Werc'hez Vari (1854), ec'h embannas ar *Syllabus* o kospañ ar vodernouriezh hag e c'halvas Goursenez Hollilizek Vatikan I.

- **Treuzlec'h relegoù sant Romuald** diazezour ar Gamaldued da Fabriano e 1481.

- E Breizh, er ^V^{vet} kantved, **sant Aodren**, mab sant Salaün I^{añ}, roue Breizh. Gant e vreur Kustentin e vije aet da birc'hirinañ da Jeruzalem. Aodren a voe roue war-lerc'h e dad e 435 ha Kustentin e vreur a vije bet roue Bretoned tramor. War an hañval eo bet kemmesket o buhez avat gant hini sant Derien ha sant Neventer.

- Er ^{VI}^{vet} pe ^{VII}^{vet} kantved **sant Trezan** (Gl. Trésan), Iwerzhonad pe Breizhad, abostolour ar Gampania (Champagne) e Bro-C'hall gant e vreudeur, ar sent Avran (Gl. Abran), German (Gl. Germain), Givrian (Gl. Gibrian), Gweran (Gl. Véran), Helan (Gl. Hélian), ha Peran (Gl. Pétran).

- E 303, e Breizh-Veur, merzherenti **sant Aol**, genidik maorvat eus Iwerzhon, meneget e goueler sant Jerom.

- En Iwerzhon, er ^{VI}^{vet} kantved, **sant Maelan**, manac'h e Gaillimh (Galway).

- Er ^{VI}^{vet} kantved, **sant Meodan pe Moldan**, penitiour iwerzhonat a vevas e Péronne e kontelezh Vermandez, en hanternoz Bro-C'hall.